



GUERZ

TRI VUGUEL DEVEZ GANT AN TAN GOALL

An 20 a viz even 1885

Ton : ar Guer a Is

Me ho supli assistanted
Da yez a attentif dagleyed
Eun recit demeus tour malhear,
Eruet he canton Lanmeur.

Er bloaz pemp a pèvar ugent
Evit rei d'an oll da entent.
An ugent d'euz a viz gouel yan,
E kichen bourk Plegat-Guerrand.

Ar pried oa eat mintin mad,
 Da dy e vignoun da c'hoënnad.
 Hag en zur countant a laouen,
 Teir heur goude oa en anken.

Ar vreg goude e dijuni,

Of eat da bont ar Vinthi
 Kanna re prim tre ma c'halle,
 'Vit dont da gaout e bugale.

An eol ho para ar goabren bur,
 Spontet oa an dud a dra zur.
 Gant ar c'hleier o son an tann,
 Mont a red-oll bras a bian.

Var ar plac'pa oant erret,
 An tann dah liden oa lampet.
 Ebba he cress ar flammou tann,
 E oant ruguethe bian.

Eur botrezic oa ho vessa,
 Hounnez a velas da guenta.
 Med alc'houezet e oa an of.
 Hag ar prenestr a oa digor.

Ar prenestr oa bet digored,
Rag ar paotr er mez e oa bet.
Kerkent oa var he c'his en ty,
Commanças an tann da flammi.

An tad paour evel ma clêvas,
Vel eur Luc'heden a redas.
A dreuz an tann en eur grial,
Va bugale zo en tann goalk.

An dud eno a lavare
Gant ho mam eat ar yugale.
Med eun bennag en oa guelek,
Ar paotr er pors en he reched

Ar varn ive en em gavas
Kichen an ty eno semplas,
Pa deue ennhî he-unan,
Felve dezi lammet en tann.

Adreus ar flammou e velet,
An daou vuguel avriated,
O crial hag o teplori,
Gant an tann he c'horf o leski!

Tri dy tōstic a' oa devet,
Neuz prezervet med a lonnet,
Pere a' oa bars al liors,
Hag en dro dan ti ar gri forz.

Couls ar plac'het vel ar goazel,
Ar bras ane a' oa semplet,
Da guement hini oa eno,
Pebez dervez meurbet c'houero.

Seiz heur anter e oa sonnet,
Da navheur tout oa consummet.
Ann oll dud d'euz ann diou barrez,
Aboe zo en dristidiguez

Evel e oa an tann mouguel,
Ar vugale a' oa clasket,
Deus founz ar prez e oa tennet.
Unan naontec miz étouffet.

En hé (Spec) ennez oa chomet,
Med an daou all oa dispenhet,
Unan ane oa pevar bloas
Hag ar c'hossa cazi c'huec'h yloas.

Seiz ugent den a oa end
En ho daoulagat an daëlo,
No de oa allet mui sicour,
Rag re bel goute oa an dour.

Var ar plac ze neb a vije
Cri ar galon neb a welje
Guelet tri innocent bian,
Merzeriet e creis an lann.

An daou bried deus ho guelet
O c'halon zo cazi rannet,
Liou ar maro en ho c'herc'hen,
Gant ar glac'har hag an anken.

An tri gorf paour oa separet,
Peb hini anezen he arched,
E ty ho amezeg tosta
Eno oa ed d'ho sebellia.

Adaleg e oant archedet
Leis an ty vije daoulinet,
Noz a de ar pedannou ker,
Vlt c'raeki joa an tri verzer.

Dar zul vintin e voa sonnet,
Ar glazou vitrei da glevet,
Vije da eiz heur interret
An tri vuguel a oa deuet.

Er barrez ne oa ket eun ty,
A guement a ie daou pe dri,
An aotrou Person a reaz,
Ar sao Korf ive var ar plac.

Ar oll veleien a vouele,
Par antonnet al Laudate,
An assistanted memez tra,
Bras a bian oant ho vouela.

En Ilis oa canet gante,
Servich hag offis an Elezad,
An Ilis ha oa ker couchet,
Kement all a oa er verret.

Hent Pouméno ha zo ledan
Mez er zul-ze oa re vian,
Parrissionis deuz a Blegad
Deuz miz even o p'ho sonj mad.

O tad a mam zo desoiet,
O Kalon a zo gouliet,
D'ho consoli noz a mintin,
Heuillit Jesus bars er Jardin.

En daouarn sac'h-hor Mesth Divin,
Guelet ar c'halic er Jardin,
E ben sac'h stouet dan douar,
E Galon rannet gant glac'har.

It bemdez mam baour d'ar c'halvar,
Eno he vezvet ho klac'har,
Sellit, sellit ous lein ar groas,
Jesus staguet gant tachou bras.

En dervez-ze var ar vein yen,
Eno mam an oll gristenien,
Deuz Jesus e vaille ar goad,
De vam guer pebez kalonnad.

Grit bemdez adaleg anoz,
It a speret da barados,
C'hui gavo consolation.

E kalon Jesus graç a pardon

C'hui tad a'mam zo glac'haret
 Sclaouit monez an doctored
 Ar bed monez eun draoujent
 Leun ha c'hlac'har hag a'nken

Dho pugale a zo roet
 Gant Jesus eur brank Olivet
 Emaint brema gant an Elez
 Epad ann oll Eternité

LOUIS SIDANNER.

(Propriété réservée.)

